

Eus Gwened da Sant-Albin-an-Hiliber e lavar Dael Breizh NANN d'ar Sijidigezh ha da Gement Nac'helouriezh parizian a ve !

Evit e 7vet Dalc'h o doa emgav an daelourien er beurevezh, disadorn 25 Gouhere 2020 e Gwened, dirak kastell an Ermin, a voe ergentaou sez Dael Meur Breizh, a-benn kemer poltred kefridiel an eil kelc'hiad daelek (2019-2022).



A gleiz da zehou : Erik DE GAUDEMONT, Tepod ERKELENS, Marc KERVELLA, Yann-Varc'h FURON, Philippe ROMILLAT, Thierry LE GOFF ha Daniel JACQUET

Kemennadenn n° KMD/2020-09 du 29 juilt 2020, Eus Gwened da Sant-Albin-an-Hiliber e lavar Dael Breizh NANN d'ar Sijidigezh ha da Gement Nac'helouriezh parizian a ve !

Evit diskouez o stagidigezh ouzh gwiriondedoù istorel o tegas da soñj da Bobl Vreizh ez eo Breujoù Breizh e Roazhon ul lezvarn nemetken, pe Dael Lezvarnel, ha n'eo ket un Dael Meur ma vez tabutet al lezennoù. E-se e oa mat mont da Wened.

KMD/2020-09 du 29 juilt 2020, Eus Gwened da Sant-Albin-an-Hiliber e lavar Dael Breizh NANN d'ar Sijidigezh ha da Gement Nac'helouriezh parizian a ve !

Pa hañval deomp bezañ deuet fall-put gervel d'ar mesenerezh embregerezhoù breton evit reiñ tu da viridi an Arzoù Kaer a Roazhon a-benn prenañ un delwennig Loeiz XIV o tronañ war e varc'h – dezhi ar priz uvel a 2,37 M€ (ha Loeiz XIV ne oa ket ar roue Bro-C'hall-se a zrestkementas an taosoù evit paeañ frejoù brezel, ha gwashoc'h zo, a gasas e Zragoned da vougañ ar Bonedoù Ruz, o krougañ tud e-leizh hag o tegas sponterezhioù dizanv (sk : bugale rostet er ber) ?

P'emañ tud vrudet 'zo o c'hervel evit ma vije tennet delwennoù 'zo oc'h aroueziñ hiziv mennozhioù politikel dizereat (sk : delwenn Colbert, aozer ar C'hod Du, dirak ar Vodadenn Vroadel Gall), e vefe reizhwiriek-meurbet evidomp-ni Bretoned diverkañ tizh-mat diwar hon holl blasennoù, straedoù pe savadurioù-skol anvioù evel hini Gambetta, Ministr ar brezel a argarzhe ar Vretoned ha krouet gantañ arme Breizh evit difenn Pariz kelc'hiet gant ar Brusianed (1870-1871) hag a gavas reizh lezel anezho da vreinañ e kamp Konli, pa 'z eas un darn all d'en em gannañ gant armoù re gozh hep boledoù.

P'emañ hon iliz-veur Sant-Pêr-Sant-Paol e keoded duged Breizh o paouez bezañ tangwallet gant un den a-youl-vat en deus profitet eus diaket ar galloudoù foran deuet-fall pa dlefe un hevelep perlez istorel hag arouezus bezañ diwallet gwelloc'h, ha ne vefe poent en em gemer e karg hon-unan ha goulenn groñs ar giriegezh leun a zo dav evit ober war-dro hor glad sevenadurel a-bezh ?

Ne c'heller ket asantiñ ken en em lezel da vezañ abuzet pelloc'h amzer gant Pariz o kenderc'hel da fiziañ enni diwallerezh ha mirerezh hor madoù priziusañ ! Hor bezet soñj, adkavet eo bet relegoù Anna Vreizh a oa bet laeret e Mirdi Dobrée met ne ziverko ket ar c'hudennoù mantrus a surentez amañ ivez, hag ouzhpenn, un nebeut pezhioù dibar bet laeret d'an deiz-se a zo chomet digavet...

Arabat gortoz eus hor perzh, daelourien vreton, e kemerfemp ar pleg da vezañ suj da nep piv bennak a ziskouezfe ur c'hrontroull peurbad war madoù ha tud a zo estren rik dezhañ, e-maez pep lezenn, o sevel taosoù, hogen divarrek da reiñ diwallerezh d'hor madoù (83% eus hon taosoù a chom e Pariz) !

E derou an endervezh, e c'hoarvezas disadorn ar 7vet Dalc'h daelek a voe votet en e gerzh, etre re all, Barnadenn krouer ar C'hevrennoù, Barnadenn Reoliadur dediet d'ar mont en-dro anezho ha Karta ar C'hevrennoù ; e gerioù all : lañset eo ar C'hevrennoù ent-kefrediel ! Ne chom nemet d'an dilennourien krouiñ o c'hevrennoù gefridiel oc'h en em zisklêriañ ouzh Burev Kevredel ar C'hevrennoù.

Antronoz, ul lid a zo bet e koun drouziwezh Sant-Albin-an-Hiliber (28 Gouhere 1488) a voulc'has diwezh dizalc'hiezh Breizh ha frankizoù ur bobl en he fezh. Muioc'h eget pemp kantved diwezhatoc'h, e vev Breizh bepred en hor c'halonoù en desped d'un trevadennerezh hiraet ; ar gwir etrevroadel avat a embann lorc'hus e c'hell ur bobl adkavout he emveliegezh ha dizalc'hiezh, n'eus nemet da bobl Vreizh bezañ emskiantek anezhi eviti da hunvreal en ur frankiz adkavet.

KMD/2020-09 du 29 juilt 2020, Eus Gwened da Sant-Albin-an-Hiliber e lavar Dael Breizh NANN d'ar Sijidigezh ha da Gement Nac'helouriezh parizian a ve !

Dael Meur Breizh a c'hortoz neuze e trofe an holl Vretoned a-du gantañ hag ez afent da sevel o c'hevrennoù evit diazezañ un erv don a c'houlennoù breton da c'hourlakaat d'ar stad c'hall un anaoudegezh fraezh ha sklaer eus Hor Broad, he fobl hag he gwirioù diazez a zo nac'het deomp evel Pobl henvroat sujet e-maez pep lezenn dre feur-emglev toull lesanvet a « unanidigezh » a 1532.

Unanet Evit Breizh!



KMD/2020-09 du 29 juilt 2020, Eus Gwened da Sant-Albin-an-Hiliber e lavar Dael Breizh NANN d'ar Sijidigezh ha da Gement Nac'helouriezh parizian a ve !